

Breman 8, ruHOICHE 35000 ROAZON

12 lwr

bremañ

HERE 1987 Niv. 73

EUSKADI

DIGOR AR CHASE

EVIT PASQUA HA PANDDRAUD



EUSKADI

SEASKA WAR AR STRAED

GWALLGASET GANT AR CRS-ed



LABOUR DOUAR

BEC'H WAR AR MAEZ

150 LABOURER DOUR EUS UDSEA ER C'HUZUL DEPARTAMANT

LIZHIRI

Kenvreudeur ger,
 O vesañ maz a brezhonegou ar vro war wanaat ha zoken war doc'horaat eus an eil dez d'egile, e klaskit emichañs skrivañ en un doare bepred asoc'h, deoc'h da vesañ komprenet, emithu, gant an holl lemmenion. Setu perak e kejer, dre ho lemmenion, gant gerioù evel "bublik", "ofisial", "referendum", "vakansoul", "objektour" h.a.:

Ret eo deoc'h gouzout evelkent ez eus ganimp gerioù reizh, -termenoù godeliet mat hag int gwelloc'h alies eget o c'hetapead gallek, -dreist-holl abaoe prantad SADED, bet kroget raktal goude darvoudoù 1968. Ha dre, demoad da yaouankizoù SADED, -ken pavezeh evel na oant gant o yezh, -eo e kavomp bremañ "kevredik" evit publik, "kefridiel" evit ofisiel, "pobliaters" evit referendum, "ehanoù" evit vakansoul, "kevneber" (kevneber-emskiant) evit objektour. Arabat e vefe disorjal seurt gerioù, ha mat e vefe da bep skrivagner kaout en e gerz an dielloù le'h m'o c'haver : dastumadur PREDER, EMSAV hag IMBOURC'H dreist-holl.

Pa vese godeliet anvadoù nevez en Hebrez, e Vietnameg (dekmitadoù abaoe an diaal-c'hteah) pe zoken e galleg e vez gwelet raktal an duerion-baper oc'h ober ganto. Perak neuze, pa vez ket eus nevez-gerioù brezhonek e chomfemp-n war-lerc'h ? Perak, dreist-holl, chom hep skrivañ e pep degouezh ar yezh wellañ ha derc'heli da voutmunañ eushadennoù evel "kredapl eo" e-lec'h "da grediañ ez eus", "paset" e-lec'h "bremenet", "binviñji" e-lec'h "binvioù" (stum anavezetooc'h dre ar brezhonegpa dre vras) hag un toullad gerioù pe droiennoù all c'hoazh evel ar re-mañ ?

Lod ao'hanoc'h, gwir eo, a ra strivoù meuladus. Hogen, dre ma ne labouront ket a-walc'h c'hoazh war o yezh, e peont bepred fasioù grevus pa skrivoñt, da skouer "kevrad" gant un d dibennel e-lec'h kevrat gant un t dibennel (kev + rat) ; temañ ouz e-lec'h temañ da ; n'eus ket tu ober e-lec'h "tu d'ober".

C'hoi, gouestlet ho puhez ganeoc'h da zifenn ha d'ADSEVEL ar yezh, n'hooc'h asped, bezit bremañ 2

mioc'h war vevzh dalc'hmata ; diskouezit brasoc'h karantez evit ar brezhoneg en ho skridoù ha labourit bemed un eurvezh pe ziv d'e beurestiañ. Rak un itron gaer eo hon yezh na sellez ket besañ mastaret evel ne vern pe liboudenn hiziv an deiz.

Ganeoc'h a galon,
 Jil Ewan.

Re wir eo, ral eo gwelet un niverenn eus Bremañ difazi, n'omp ket sur ez eus bet zoken! N'eo ket dre zievezh moarvat, dre ziouer a amzer ha diouer a dud kentoc'h pa rank ar skipailh gouestlañ un tamm mat eus hec'h amzer vak da eban ar gelaouenn.

Ur gelaouenn geleier eo BREMAÑ da zigenañ penn hag evel an holl gelaouennoù keleier e rank besañ skrivet en ur yezh aes da lenn. Ar pezh na rank ket mirout ouzhoop da goust pennadoù diaesoc'h ha donoc'h gwech ha gwech all. Pa 'z eus anv eus gerioù reizh avat e chom alies dangorel-tre an dibab.

Perak e vefe reizhoc'h ar ger "predoniez" eget ar ger "psikologiezh" lakaomp ? Ablamour ma z'eo tostoc'h diouzh ar c'hembraeg "seicolog" ? Na pet ger brezhoneg a zo amprestadennoù ! Piv a soñje dilezel gerioù amprestet all latin evel "niver", "iliz"... pe d'ar romanege "chadenn" hag all...

Evel meur a yezh all e c'hell ar brezhoneg kaout koubladoù evit gerioù 'zo... Ha reizhoc'h eo ur ger nevez godeliet eget stum brezhonek ur ger etrevroadel ? Subjektivel e vo ar respont atav.

Ken talvoudus all e chom labour Imbourc'h avat, war dachennoù evel hini ar gerioù prederouriezh dreist holl, met d'ar vrezhonegerien eo da zibab hervezh o dangorelezh...

Deskiñ a ran brezhoneg abaoe ur bloaz dija, ha plijout a ra din lenn ho kasetenn "Bremañ". Setu perak e skrivan deoc'h evit besañ Koumanantet, ur chekem Koumanant skoazell a zo gant al lizher-mañ. Ur goulenp : perak ne vez ket skrivet Roazhon gant an "h" e-barzh "Bremañ" ?

Yann Guicheteau (Remengo).

Pa oa bet diazezet reolennoù reizhskrivadur ar skritur peurunvan e oa bet aotreet implij "ROAZHON" ha ROAZON. Al lizherenn ZH a vez distaget "h" e bro Wened ha "z" e lec'h all, evel ma ouzit."ZH" Roazhon avat a vez distaget "h" e bro-Wened, "z" e Bro-Leon. Met ne vez ket distaget e lec'h all. Un dalvoudegezh disheñvel diouzh hini ZH Breizh en deus lakaomp. Ablamour da se e kaver an daou stum skrivet e Bremañ. Met gwir eo, luzietoc'h eo ar gadenm...

Kenvroad ker,

Setu amañ ur chekem evit ma adkoumanant d'ho kelaouenn BREMAÑ a resevan bep miz gant plijadur. War niverenn 70/71, em eus gwelet e oa bet embannet nevezig 'zo un tremen-hent breiz-hañ gant ar c'hevredigezh "An Daol Grenn". Daoust hag-er e vefe posubl gouzout er mizioù da zont pet a Vreizhiz o devo prenet an tremen-hent-se ? Ha daoust hag en emañ e soñj tud e karg eus "An Daol Grenn" aozañ traoù all, da skouer timbroù evel ma ra Kermeveuriz ?

A galon ganeoc'h evit ar brezhoneg.
 J.M. Mahe (44-St Joachim)

Kenvroidi,

Emaon o paouez lenn niverenn gwengolo BREMAÑ (n°72). E-vit meur a abeg n'em boa ket bet tu d'hen ober abretoc'h.

Pajenn 12, er pennad "an divoustrañ", e kavan an div frazenn-mañ, "a-boan ma 'z int set pelloc'h gant o atersoù amsteriek hag o pikoù-goulenmata eget Vincent Seité hag e lasseñ, pa oa bet anv da lidañ n'ouzon ket peseurt deiz-habloaz marv an Aotrou Perrot. Bez o doa asantet ar Vleun-brugerien vinniget-mañ d'iverkañ anv diazeour an aozadur diouzh pep skritell, diouzh pep kemennadenn, ha tevel diwar e beanaer prezegennoù, dezho da sentañ ouz Vestaled birvidik Neved ar Stad-C'hall (Ouest-Torch ha Telegramme).

N'anavezan ket E.K. N'ouzon ket pe oad eo hag en unvan ne oar ket ez resis eus

EUSKADI

DIGOR AR CHASE

EVIT PASQUA HA PANDDRAUD



ZONAS VERDES Y
 PARKING PARA TODOS

petra emañ o komz (n'ouzon ket peseurt...): Aon am eus ne vefe er frazennou-se nemet un adsked eus ar vojenn ijinnet un nebeut bloavezhioù zo diwar-benn kendalo'h ar Bleun-Brug dalc'het e Landivisio e 1955 da gefeuer hanter-kantved bloavezh ar gevredigezh kroust gant an Aotrou Perrot. N'eus eus ar vojenn-se nemet gevter penn da benn.

Gwir eo o doa an "Telegramme" hag an "Ouest-France" en em glevet evit boñketañ ar c'hendalo'h ma vefe komzet diwar-benn an Aotrou Perrot : ger ebet er c'helaouennoù nag arak na goude ar c'hendalo'h. Met gwir eo ivez n'int ket deuet abenn eus o zaol, ranket o deus plegeañ ha morse n'eus bet mioc'h a vuderezh arak seurt kendalo'h er c'helaouennoù-se.

Ne lavaran ket e oa tu da lenn anv an Aotrou Perrot en o frazennoù. Met gwir eo ivez n'eo bet kammet neuze er roll a oa bet divizet. D'ar Gaener 29 a viz Gouere ez eus bet teir frezegenn gant tud o doa labourt gant an Aotrou Perrot. D'ar Sadorn ez eus bet un ofereñ e Koatkeo (Skrignag) hag ivez ur brezegenn gant Herri Caouesin diwar-benn an Ao. Perrot hag e labourioù.

Re hir e vefe kontañ amañ kement tra a zo bet graet e-pad an tri devezh-se o tegas da soñj eus an Ao. Perrot (pezhioù c'hoari, kanaouennoù, taolennoù war al leurenn, hag all...)

E-pad ar c'hendalo'h eo bet gverahet ul Levrig-roll hag et Levrig-se e oa din bajenn diwar-benn an Ao. Perrot hag ivez e skeudenn.

Me eo a oa er mare-se e penn "al laz-sentiñ". Kenavo.

Gab ar Moal (An Naoned).

Lennit al liamm A
 Koumanant bloaz 120 lur (studierien, soudarded ha tud dilabour : 100 lur)
 Skrivañ da : AL LIAMM 16, straed des Fours à Chaux - 35400-St Malo

D'ar Merc'her 30 a viz Gwengolo e oa tapet Santi Potros gant ar bolis c'hall ha kinniget d'ar yoc'h-stlenn evel nouspetvet "niverenn gentañ" ETA. Ger ebet, pe dost, er c'hazetennoù, diwar-benn pajennoù levr bloaziek Amnesty International o tamall ar skazhadennoù repudiñ gant ar C'hallaoued hag ar jahinerzh gant poliserien Bro-Spagn.

D'ar Sadorn 3 a viz Here e oa laket 2000 a boliserien c'hall da furchal un 100 ti bennak ha da herzel un 80 den en Euskadi, e Su Bro-C'hall hag e Breizh zoken, e kompagnunezh poliserien spagnol ha kazetennerien eus Pariz bet pedet da arvestiñ ouz an dorioù dic'hastet, ar prenestroù diframmet, ar merc'hed hag ar vugale gwallgaset. "Un oberenn galo-nek", a oa titl pajenn gentañ

West-torch ar 5 a viz Here : 40 den kaset da Vro-Spagn da zrailhañ d'ar "xakurrak", ar chas o gortoze en tu all d'an harzou. Ar gribed a oa o tastum Yuzevien er "Vel d'Hiv" e Pariz e 1942 a oa ken kalonek all.

E keit-se edo Fañch Mitt ha Chirac o tegemer er Panton Iudu René Cassin, kelennur gwir, Priz Nobel ar Peoc'h, hag unan eus saverien bennañ Diskleriadur Etrevroadel Gwirioù Mab-Den e 1948. E Baiona, e Bro Euskadi, e voe ganet Cassin. Lkisat dezgouezh. Heugusat pipoulserzh.

N'eo ket gant gwirioù Mab-Den eo chalet ar C'hallaoued evit tud ha n'int ket, pe ne fell ket dezho bout Gall. 60 maer "abertzale", broadelourien o deus klemmet a-enep da emzalc'h ar boliserien. Eskob Bationa ivez.

Luc'hskudeenn Lena Louarn

SEVENADUR

DIBENN SIZHUN PREDER GANT

KUZUL SEVENADUREL BREIZH



Luc Haskedenn Lena Lannar

E-pad daou zevrez d'an 19 hag 20 a viz Gwengolo eo bet bodet dileuridi ar pouezusañ emsaviou sevenadurel e Kreizenn ar Briantais e Sant-Malo. Pedet e oant bet gant Kuzul Sevenadurel Breizh da brederiañ war ar skeudenn a roont anezho o-unan d'an dud a-zia-vaez ha war o oberiantiz. Un tregont bennak a zileuridi a oa en anv Kendalc'h, Kuzul ar Brezhoneg, Bodadeg ar Sonerien, Skol An Ensav, War 'L Leur, Diwan, Kan an Douar, Burev Europa ar Yezhoù Bihan, Unvaniezh Bro Roazhon ar C'hevredigezhioù Sevenadurel, Buhez, Dastum, La Boueze, Unvaniezh ar Gelennerien, Kevredigezh Kelennerien Brezhoneg Paris, Kenlabour, An Here, KEAV, Kreizenn Sevenadur Keltiek bro Sant Nazer La Nef, Barzhek Breizh, Kreizenn Sevenadurel Sant Malo.

Klasket o deus, asamblez, en em zielefennañ, dielfennañ o doareoù-labourat, da vont endro, o c'hudennou, penaos e w-lont o da-zont, ha peseurt da-rempep a zo etrezo hag o endro, ar gevredigezh e-lec'h na revont.

E-touez an ezhommoù pouezusañ e

zusañ eo bet lakaet tri war wel en un doare ispisial :

■ Kaout tud yaouank da gender-c'hel gant al labour graet gant an dud en oad dija : ar re-mañ a vez paket bremañ gant o buhez familh, o micher, diaesterioù labour alies. Hag alies, ar re yaouank a rank mont kuit ur wech stummet. Peseurt labour a vez graet war-du ar re yaouank?

■ Stummañ an dud peogwir ez eo ret, bremañ, kinnig danvez pe abadennoù mat. Hag hir kenañ eo stummañ an dud. Bloavezhioù a ranker lakaet evit dont da vezañ ur soner mat, da skouer.

■ Labourat en un doare micherel da lavarout eo gant tud paet a-hed an amzer da gas al labour war-raok. Gwellet eo bet peseurt arakadennoù a zo bet graet gant an embann, da skouer, p'eo bet implijet un den evit an HERE, ha penaos eo bet diorreet ar bagadoù e Penn-ar-Bed, abaoe ma 'z eus daou zen gopret en departamant.

Klasket eo bet sellout ar bed tro-war-dro : Breizh, Europa, ar bed. Peseurt cheñchamantoù bras a zo bet er bloavezhioù diwezhañ, peseurt re a vo, gant an diorreadur ekonomikel,

gant an dud o kuitaat ar maezioù evit mont d'ar c'herioù, gant ar binvioù kelaouiñ ha daremprediñ oc'h en em skignañ e pep lec'h, gant Europa o sevel tamm-ha-tamm daoust d'an diaesterioù ?

Peseurt strategiezh a zo gant an emsav sevenadurel e-keñver ar cheñchamantoù-se ? Daoust hag-eñ ez eus unan da gentañ ? Daoust hag eñ ez eo prest da implij degouezhioù nevez evel kresk pouez ar Rannvro da skouer, pe hini Europa evit kas e stourm war-raok.

Moarvat e oa bet soñjet gant pep hini en elfennoù-se tamm-pe-damm ha diouzh e du. Met talvoudegezh an dibenn sizhun-se a oa prederiañ asamblez ha gant skoazell un den, un animatour a-zia-vaez (n'eo ket breizhat) kaset gant an INODEP (Institut pour le Développement des Peuples). N'eus ket bet tu da gas ar preder pell-tre. Met, war a seblant ne zlefe ket bezañ ur gejadenn hep da-zont ebet. Talvoudus e vo bet da bep hini, met talvoudusoc'h c'hoazh ma c'hell disoc'hañ war ur strategiezh boutin da zifenn interestoù Pobl Vreizh. ■ T.L.

NUKLEEL

SKOUER BROIOU AN HANTERNOZ

DILEZEL AN ENERGIEZH NUKLEEL

P'emañ EDF o klask sevel ur greizenn nukleel e Bro Naoned, ha pa glexer bremañ kadoriad Kuzul Jeneral AODou-an-Hanternoz o tiskleriañ en dije c'hoant kaout unan en e repartamant, eo dedennus sellet ouz ar pezh a c'hoarvez e broioù all.

Ar bloaz-mañ en deus embannet gouarnamant (sokial-demokrat) SVEDEH e krog e 1993 da zilezel an energiezh nukleel ha pa talvezfe an dra-se ur c'hresk e koust ar bevañ. E Danmark hag en Norvegia e sav niver brasañ an dud a-enep d'an energiezh nukleel ha n'eus bet savet kreizenn ebet en div vro-se. E Bro Finn e paouezer da sevel kreizennoù nukleel nevez.

N'eo ket peogwir e kave dezhañ e oant diasur en deus gouarnamant Sveden divizet serriñ kreizennoù nukleel ar vro. Hogen kentoc'h peogwir e save mouezhioù niverusoc'h-niverusañ ha kreñvoc'h-kreñvañ a-enep d'an energiezh atomek e-touez an dud, dreist-holl ar re yaouank, ha peogwir e vo du-hont ur vouezhiadeg veur e miz Gwengolo 1988.

Abred a-walc'h e krogas Sveden d'ober gant energiezh nukleel. Gant he feder c'hreizenn, gant bep a dri reaktor, e pourchas an energiezh nukleel an hanter eus ezhommoù tredan ar vro. Ha betek-henn n'eus bet tamm gwallzarvoud ebet. Met a-bred ivez e kreskas niver an enebourien, hag en o fenn strollad politikel ar C'hreiz. A-drugarez d'o emzalc'h enep-nukleel dreist-holl e voe trec'h ar re-se war ar Sokial-Demokrat hag e kemerjont o flas e penn ar vro e 1976.

Derc'hel a reas paotred ar C'hreiz d'o ger hag e 1980 e voe aozet ur referendum war an dud a zisklerias e felle dezhe e ve serret tamm-ha-tamm kreizennoù nukleel ar vro neuze. Divizout a reas ar gouarnamant e paouezfe an holl reaktorioù da vont endro ar bloavezh 2010.

Gwallzarvoud Tchernobyl a roas arguzennoù ouzhpenn da enebourien an energiezh nukleel Strollad ar C'hreiz, ar Gomunourien ha strolladoù ekologourien a c'houlenne groñs ma vefe serret an holl dredanvaou nukleel a-raok dibenn ar c'hantved ha ma vefe kroget diouzhtu.

Ouzhpenn-se e voe pedet Sveden gant gouarnamant Danmark -ur vro di-nukleel anezhi- da serriñ kreizenn Barsebäck, ur greizenn en em gav war aod kreisteiz Sveden, a-boan 20 km diouzh København, kêrbenn an Daned. Barsebäck, an hini surañ eus holl dredanvaou nukleel Sveden, gouez d'ar gouarnamant svedat, a brodu 40 % eus ezhommoù energiezh rannvro ar C'hreisteiz. Met evit an Daned e oa unan eus kreizennoù nukleel gwashañ lec'hiet ar bed a-bezh : 40 km tro-dro dezhi ez eus daou vilion hanter a dud o vevañ. Evit ma kendalc'hfe Sveden ha Danmark da gaout darempredoù mat e ranke Barsebäck klozañ.


Sed en deus embannet kentañ Ministr Sveden, an Aotrou Carlsson, e chomo a-sav kentañ reaktor Barsebäck e 1993 gant an eil e 1994. A-benn an nebeut

mizioù ac'hann e vo degemeret, gant skoazell an darn vrasañ eus an deputeed, ur steurn da serriñ kreizennoù nukleel all ar vro.

Gouzout a oar ar gouarnamant svedat koulskoude e c'hell -fe koust ar bevañ kreskiñ kalz abalamour da se. Jedet en deus e kreske priz an tredan eus 50 % a-benn dek vloaz ac'hann. Koustusoc'h e vo an danvez-energiezh enporzhiet gant granterezhioù bras Sveden : eoulmaen, glau, gaz. Kavout a ra da Svediz koulskoude e talv ar boan paeañ ar priz-se.

E Bro Finn e sav an dud a-enep d'an energiezh nukleel ivez, war skouer o c'hamaraded eus Sveden, hag ur pouez o deus bremañ an enebourien e buhez ar var reaktor nukleel, bet savet etre 1977 ha 1980. 40 % eus ezhommoù energiezh ar vro o bour-chasont. Goude gwallzarvoud Tchernobyl avat eo bet dilezet ar raktresoù da sevel unan all. Kavet en deus gwelloc'h ar gouarnamant, o c'hortoz divizout petra vo graet gant ar c'hreizennoù a zo, paouez da sevel re all. ■

Iwan Kadored.



Atomkraftwerk in Schweden-Vorbild in Sachen Sicherheit

bremañ 7

LEZENN

AR BREZHONEG



Luc'hskouderenn Lena Louarn

Bout ma n'eo ket gwiraour skrifer ar pennad-mañ e krad dezhañ e talv ar boan d'an holl vrezhonegerien deskiñ a-zivout an darepredoù etre ar yezh a gomzont hag ar gwir er stad a vevont enni.

N'eus bet o plediñ gant an danvez-mañ, betek-hen, nemet un dornad stourmerien, ar re tamallet dezhe terrif lezenn ar Stad C'hall dreist-holl. Diwar o c'houst o deus prenet ur skiant a c'hall servij d'an holl. Gante eo bet anataet ar gwaskerezh sevenadurel a c'houzañvomp hag a vir ouzh hon yezh da zior-ren. Gante ivez eo bet emskianteket meur a Vreizhad, ha dihunet ar c'hoant da wellaat stad lezennel hon yezh. Evit reiñ tu d'ar vrezhonegerien ober ganti muoc'h-mui, mar karont ha mar kredont ober, ha stourm eviti ervat, e ranker kregiñ gant anaout gwella ar gwirioù a zo dimp.

HON GWIRIOU

Gwir ebet n'en deus ar brezhoneger a venn ober gant e yezh en e vro. Dre gomz pe dre skrid, evit kaout ur respont, eo gwella ober gant ar galleg pe...

ar saozneg eget gant yezh ar Vro, pa vez afer ouzh ur velestradurezh bennak. Gant embann Villers-Cotterets, e 1539 (7 vloaz goude ar stagidigezh) eo e voe lakaet ar galleg da yezh nemeti melestradurezh ar Frañs, a-hervez... petra bennak ma c'haller arguzenniñ (en aner betek hen) ez eus ur ster all gant gerioù ar skrid ("langue maternelle française" : yezh-vamm c'hallek pe yezh-vamm a Vro-Frañs ?), goude ma kavod lod da larout ne oa ket bet mari-lhet an embann-se gant Breujoù Breizh, evel ma tleje bezañ bet graet hervez Emglev 1532, ha daoust ma c'haller soñjal ne dalv ket embann ur roue kement ha Diskleriadur Gwirioù Mab-Den 1789.

Al lezennou nemeto o tennañ d'ar yezhoù, kouz larout, eo ar re a denn d'ar galleg... evit e zifenn ouzh ar yezhoù all, ouzh ar saozneg, evel just met kenkouz all e c'hallfent talvezout a-enep d'ar brezhoneg -evel lezenn an 31 a viz Kerzu 1975, en deus servijet da gondaoniñ ur c'henverzhour na rae nemet gant gerioù saoznek war roll-meuzioù e stal-. Hervez al lezenn-se, da skouer, e tle kontaouerezh ar c'hevredigezhioù (kenwerzhel) bezañ dal-

c'het e galleg. Ar bruderezh a rank ivez bezañ graet e galleg; ar skritelloù FESTOU NOZ zo emaez al lezenn etal

Koulskoude, daoust da gement-se, ez eur deuet a-benn da c'honit ar gwir da ober chekennoù brezhonek, da skrivañ gant chomlec'hioù brezhonek ha da voulañ ar chomlec'hioù-se war ar c'harnedoù-chekennoù, div-yezhek a-wechoù. Kement-se ne vije ket bet posubl hep youl un nebeut tud, ha mantris e vez gwelout brezhonegerien all na gredont ket ober gant ar gwirioù-se, a zo bet gonezet evito ivez, hag a c'hall bout kollet c'hoazh ma ne vez ket graet muoc'h ganto, yezh ar vezh atav !!!

Gwirioù all a c'hallfe bout gonezet, en desped d'al lezenn, ma kredfemp holl ober ganti. En hon lizhiri d'ar velestradurezh da skouer. War gement paperenn da leuniañ, dreist-holl. Rak ma 'z eo ret d'ar velestradurezh ober gant ar galleg n'eus lezenn ebet o rediñ ar geododourien d'ober heñvel.

LEZENN

HAG AR GWIR

LEZENN 1951

E nep lezenn eta, nemet hini 1951, anvet ivez Lezenn Deixonne, ne vez kaoz eus ar brezhoneg. Ne sell homañ nemet ouzh ar c'helenn avat. Ha ne ra nemet reiñ tu da gelenn. Koulskoude ma oarfe ar familhoù he lakaat da dalvezout aliesoc'h e c'hallfe muoc'h a vugale kaout skol vrezhoneg.

Hervezi e c'hall kement skoliad a gar tremen un armo-denn diret dre gomz ar vache-louriezh ha goullenn ar c'hente-lioù evit he frientiñ. Evit bout sur da gaout kentelioù brezhonek avat eo ret bout ken niverus ha 15, evel m'hen diskouez c'hoazh barnidigezhioù diwezhañ Lez-Varn ar Velestradurezh e Roazhon (Genver ha C'hwevrer 1987).

Lezenn nevez ebet abaoe 1951, bout ma c'haller, abaoe 1979, kemer brezhoneg evel "eil yezh vev" adalek ar pevare klas ("LV2"), abaoe 1982 evel trede yezh en eil klas ("LV3"), hervez reolennoù na vezont ket laketa a-walc'h da dalvezout.

Gant sikour Lez-varn ar Velestradurezh avat e c'hallfent bezañ, gant ma kredimp ober ganti.

LEZVARN AR VELESTRADUREZH

Tud skolidi zo a venne e vije kelennet brezhoneg d'o bugale o deus bet kaset rekedoù da Lezvarn ar Velestradurezh e Roazhon (unan all zo e Naoned) dre ma ne veze ket sentet gant skol o bugale ouzh lezenn 1951 ha ma ne veze ket roet tu dezho heuliañ kentelioù brezhonek.

D'an 31 a viz Kerzu 1981 e oa bet embannet gant Lezvarn ar Velestradurezh e Roazhon eo ar gwir gant tud eus Monlestradurezh da skouer. War gement paperenn da leuniañ, dreist-holl. Rak ma 'z eo ret d'ar velestradurezh ober gant ar galleg n'eus lezenn ebet o rediñ ar geododourien d'ober heñvel.

D'an 29 a viz Genver 1987 e roe barnerien Roazhon da c'houzout e oa ar gwir gant JY Broudig, tad ur bugel eus ur skol-vamm, pa glemme e oa bet paouezet gant ar skol vrezhonek eno e-pad bloaz, rak ne oa ket bet asuret kendalc'husted ar servij publik. Tra-walc'h a skolidi a oa c'hoazh en dro-mañ

Ar memes deiz avat e tistaoled reked Lena Louarn, a c'houlenne brezhoneg e skol he mab, dre an abeg na ne oa ket bet kavet ar pemzek skoliad zo ret hervez lezenn, daoust ma ne c'haller ket ober "enklask"eus labour ar rener. Aze e vije bet ret ober un enklask-kontrol a-benn kaout ur chañs da c'honit, da laret eo bezañ aozet gwelloc'h (*)

(*) Souezhusat tra : en deiz ma teue an afer dirak al Lezvarn (e viz Genver !) e kroge ar c'hente-lioù er skoll!

Kement-se a brou ez eus tu lakaat al lezenn da dalvezout mar kemer ar familhoù emskiant eus o galloud. Ha mar mennont ober gantañ. Hag aozadur avat zo ezhomm : ar Gelemerien Brezhoneg hag an APEEB, Kevredigezh tud ar vugale evit kelenn ar brezhoneg. D'an dud d'ober gante : ar skiant o deus prenet a die servij d'an holl.

Evezh a vo taolet n'heller ket klemm e Lezvarn ar Velestradurezh evit ar skolioù prevez... peogwir ez int prevez Rekedoù all, o tennañ d'an Deskadurezh-Stad, zo bet kaset gant izili eus ar c'hevredigezhioù meneget uheloc'h. Re all zo bet savet c'hoazh, diwar-benn ar chomlec'h brezhonek, a-enep da Renerzh ar Post hag an Tailhoù dreist-holl, gant hiniennou all.

SEVEL REKEDOU ALL

A-raok kas ur rekod da Lezvarn ar Velestradurezh e ranker da gentañ : ober ur goullenn fraezh ouzh ur velestradurezh bennak (Deskadurezh, Pos-

toù, hag all) ; e ziazezañ war ar gwir, hag e gas dre lizher erbedet. Mar bez distalet ho koulenn, pe ma ne vez ket respontet deoc'h dindan 4 miz (a zegouezh alies !) ho pe 2 viz da sevel ho rekod ha d'he c'hvas da Lezvarn ar Velestradurezh, e Roazhon pe e Naoned. Un testi-degemer a vo kaset deoc'h, hag a-benn un nebeut mizioù e tegeeroc'h, a-berzh ar Velestradurezh a damallit, un teul o respont d'hoc'h arguzennoù. Un daou viz a vo roet deoc'h da respont d'an teul-se.

Ne chomo mui nemet kemer pasianted ha gortoz ar varn : daou vloaz bennak a-wechoù...

Mont d'al Lez-varn a goust ker, emezit ? Mont dirak hini ar Velestradurezh ne gousto ket ur gwenneg deoc'h. Ha n'hoc'h eus ezhomm alvokad ebet -nemet karout a rafec'h paeañ unan. Ouzhpenn-se n'eo ket ret gortoz kaout aferouzh an Deskadurezh : rekedoù all a c'haller sevel.


Bankoù zo, pa vez goullennet digante, a vout ho chomlec'h e brezhoneg war ho chekennoù. Ar CCP avat a nac'h ober. Nac'h kement-se a ra ivez an Tailhoù. Setu aze danvez-rekedoù evit an neb a gar. Trech'h asur ebet avat.

EL LEZIOU BARN ALL

Ral eo bet betek-hen an dud aotreet da ober gant o yezh dirak ul lezvarn : kement-se zo bet c'hoarvezet e Gwengamp gant Herve ar Beg e 1984 ha gant Gwenole Bihanig ha Fadrig Herve e 1986 en Oriant (*). A-hend-all ne vez aotreet nemet ar re ne gomzont ket galleg. Nac'het e vez evit abegoù lezennel : ne anaevz al lezenn nemet ar galleg ha honnez eo yezh an holl Frañsizien, c'hwil ha me en o goullenn, seul vui ma tesker galleg en holl skolioù ar Republik.

Dimp e seblant e c'haller dispenn an arguzenerezh-se : an deskadurezh zo ret, deskiñ galleg avat n'eo ket, ha mar bez tapet ar vachelouriezh gant lod ne brou ket eo bet tremenet

AR BREZHONEG



Luc'hakeudean: Lena Louarn

1986, ha dre ma vez nac'het ar rekedoù brezhonek gant lezioù-barn ar Velestradurezh (barnadenn an 21.11.84), e c'hallfed kas war-eeun da Jenova evel kemennadennoù ar rekedoù nac'het-se, ouzhpenn ma 'z eus bet diskleriet gant Kuzul-Stad ar Republik Gall (22.11.85) e oa reizh o nac'hañ pa ne oant ket savet e galleg.

AN ENGLEV ETREVROADEL

Sellomp a-dost ouzh skrid an Emglev ha gwelomp ar c'hre-fen anezhañ na vez ket doujet dezho gant ar Stad a vevomp dindani.

Lez a ramp a-gostez ar mellad kentañ a denn da wir ar pobloù d'en em ren o-unan (n'eo ket anavezet Pobl Vreizh gant ar C'hallaoued) evit chom gant gwirioù hiniennel ar vrezhonegerien.

Mar bez mouezhiet e Stras-sburg an danvez-mennad a-zivout ar yezhoù "bihanaet" e c'hallfe an traoù gwellaat, daoust ma soñj kalz a dud e kavo c'hoazh ar varnerien an tu da chom hep displeijout d'ar c'hallaoued.



Luc'hakeudean: Lena Louarn

AR BREZHONEG HA KUZUL ETREVROADEL GWIRIOU MAB DEN

E Geneva emañ sez Kuzul Etrevroadel Gwirioù Mab-Den ha n'eus forzh piv a c'hall kas dezhañ kemennadennoù diwar-benn ar gwirioù a vez nac'het outañ gant ar stadoù sinet gante an Emglev Etrevroadel diwar-benn ar Gwirioù Keodedel da Politikel.

Evit-se avat eo ret e ve-fe bet kaset da benn ur prosezadur e-diabarzh ar Stad hec'h-unan. O vezañ m'eo bet sinet an emglev gant ar Stad C'hall e

an arnodenn-se e galleg: skouer Jil Killevere e 1979, hen dis-kouez splann. Un amrouenn c'hallek a zo, met meur a vloaz goude un arnodenn, tremenet gante meur a yezh estren, pet den (ha pet barner ?) zo gouest da ober gant ur yezh n'he deus ket talvezet dezho en o labour nag er ger ?

Ouzhpenn-se, deskiñ galleg ne dalv ket kement ha "dont a-benn da c'houzout", e galleg zoken ! C'hwitadennoù zo er skol ivez !

(*) Hag adarre e Gwengamp e 1987

KENGOR EUROPAT GWIRIOU MAB DEN

Kas ur reked d'ar C'hengor-se a c'haller ober, o vezañ m'eo bet sinet gant ar republik gall Emglev Europat Gwirioù Mab Den, nemet gant ma vo echu gant ar prosezadur gall (lez-terriñ-barn ha Kuzul-Stad eta).

Ret eo gouzout avat n'eus bet degemeret gant al lez-varn-se hini ebet eus ar rekedoù savet gant Bretoned evit-gwirioù evel brezhonegerien, daoust ma oant holl diazezet war mellad 14 an Emglev Europat a zifenn e ve droukziforc'het an dud en abeg d'o yezh.

Evel-se e voe kont gant ar re a voe kaset gant Herve Kerrain, Jil Killevere, war zigarez o doa afer ouzh an arme,

HAG AR GWIR



Luc'hakeudean: Lena Louarn

Ar mellad daou, a zisklerier en arroud kentañ anezhañ e c'houestl ar Stadoù doujañ d'an holl wirioù anavezet en Emglev hep diforc'hañ an dud hervez o gouenn, liv, yezh, hag all... En eil arroud e lenner e c'houestl ar Stadoù kemer di-arbennoù lezennel evit lakaat da dalvezout ervat ar gwirioù anavezet en Emglev. Hervez an trede arroud e rank ar Stadoù reiñ tu d'an dud reketiñ da zic'haou. Aes eo gwelet ne vez ket doujet d'ar reolennoù-se gant ar Stad C'hall.

Taolomp pled ouzh ar melladoù 14 ha 16, a embann kevatalded an holl dirak al lezioù-barn hag a anavez personelezh lezennel an holl e pep lec'h, hag ouzh ar mellad 19 a ziogel ar frankiz d'en em zisplegañ (ha pa vije e brezhoneg). Evit ar mellad 24 eo d'ar bugel ec'h enever ar gwir da vezañ gwarezet gant ar Stad hep na ve droukziforc'het, en abeg d'e yezh, hag all...

Hervez ar mellad 26 eo dileet d'an holl gwarez al lezenn ne vern o yezh. Hervez ar mellad 27 n'haller ket nac'h ar gwir da goz o yezh digant izili "bihan-niveroù".

N'eo ket anavezet ar mellad 27 gant ar Stad-C'hall war zigarez n'eus ket a "vihanoùed o vezañ gall ha kevatal, da larsont. Kement-se ne defe


ket mirout ouzh den da gas kemennadennoù a c'hallo kelaouiñ tud ar C'huzul Etrevroadel-se diwar-benn an droukziforc'hañ a vez gouzañvet gant ar vrezhonegerien e Breizh, ar re a venn mont en o yezh e pep degouezh ouzh ar velestradurezh da vihanañ.

DROUKZIFORC'HAÑ

Gaou ebet ne vez graet ouzh ar vrezhonegerien, p'o deus aotre d'ober gant ar galleg ! Setu poell ar Stad C'hall, ha hini kalz eus hon c'henyezherien a ra gant ar galleg e kement degouezh ofisiel a zo...

Biskoazh ivez, a-hed ar c'hantvedoù, n'eus bet eus kudenenn an anvioù-lec'hioù e Breizh, pa ne c'houlenne dan e vijent brezhonekaet, ha biken ne vije savet ar gudenn hep un toullad tud nevez krog d'hen goulenn start.

Ne sell an droukziforc'hañ yezhel eta nemet ouzh ar re o devez trubuilhoù en abeg d'ar brezhoneg, pa c'houlennot brezhoneg er skol evit o bugale, pa skrivont o chomlec'hioù e brezhoneg, pa fell dezho komz o yezh el lezvarn, hag all (*).



Luc'hakeudean: Lena Louarn

Gant ar Stad C'hall, ha ganti dreist-holl eo e vez droukziforc'het ar vrezhonegerien, pa nac'h anavezout ar yezh a reomp ganti, pa reomp ganti.

En desped d'an danveziou-lezenn savet gant meur a gosten-zenn bolitikel c'hall a-raok an dilennadeg-mañ-dilennadeg, ha taolet d'ar blootoù Kerkent ma ne veze euzhomm anezho; daoust d'al lizhiri ha sinadegoù a bep seurt, ha petra bennak ma 'z eus bet sinet gant ar Stad C'hall meur a emglev etrevroadel o kondaoniñ an droukziforc'hañ yezhel, e chom atav hon yezh e-maez al lezenn.

Koulskoude emañ hon gwir dreist d'al lezenn-se. Greomp gantañ. Hiziv (**), evit ma vo anavezet dimp arc'hoazh.

(*) tost da 5 Milion a dell-gastiz en deus bet Christian Georgesault da baeañ evit un afer panelloù liwet gant tud en doa prestat e garr dezho, nac'het en doa diskleriañ piv e oant.

(**) Evit titouroù da sevel rekedoù hag all : Stourm ar Brezhoneg - stradaed an Tier-Barn - 56000 - Gwened - Da c'hortoz goulenneit a ve skrivet ho choalec'h e brezhoneg war ho chekennadenn, lakit ar CFRE (pellgoaz), EDF, an tailhoù d'ober kesand-all. Ha perak chom hep nac'hañ al lizhiri gant ho choalec'h e galleg ?

LABOUR DOUAR

BEC'H WAR AR MAEZ

150 LABOURER DOUR EUS UDSEA ER C'HUZUL DEPARTAMANT



A-dra sur n'edo ket kuzulierien departamant Penn-ar-Bed o c'hortoz kement all dimeurzh vintin 6 a viz Here. Aloubet sal vras ar c'hendivizoù gant 150 peizant eus an UDSEA. Ha Jean-Yves JEZEQUEL, ar penn sekretour da reñ dezho un tañva eus trubuilhoù lies-seurt ar brodukourien vihan en departamant.

"Soñjal a ra lod" emezañ "es eo an enkadenn a hirtiv war mare'had ar moc'h ar pris da baeañ evit ma vo gae'loc'h an amser da sont. E-se eo emañ lod o kontañ e rafe freustal kalz a brodukourien evit ma c'hell-fent kreskiñ int... ! Met an holl eo ha en em gavo war un hent-sao'h dizale ; padal ez eus diskoulmoù aes da lakaat er pleustr hirtiv an deiz".

"Petra soñjal", emezañ o'hoazh, "eus an doare da vevañ ar c'hotaiou war al laezh. P'o dije ranket bezañ ingalet a wel d'an holl ez eo dre guez ha dre laer int bet roet da lod, dre

hanterouriezh ar bodad (DDA ha sindikadoù) e-lec'h ma n'o deus ket o flas ken ar sindikadoù bihan evel CNSTP (*), Confédération Paysanne (*) pe UDSEA".

Statut ar c'hotaiou hon eus bet tro dija e Bremañ da gaozeal diwar e benn. Stag eo ar c'hota ouzh an douar.

"E se eo", eme J.Y. Jezequel, "e kustum ar statut-se reiñ tro d'ar re vras, perc'henn war ec'honderioù bras a zouar, da binvidikaat o'hoazh tra ma rank ar re vihan be ar beizanted feumet o atant ganto, ober gant ar pesh o deus."

Hag evit bravaat c'hoazh an daolenn, e venegas ivez J.Y. Jezequel stad ar brodukourien deñved ha chatal kig, gwasket gant ar prizioù hag hini ar brodukourien legumaj o c'headal ma teufe ar yalc'hadou prometet er goañv-mañ goude ar skorn.

"Arabat bezañ souezhet neuze" eme J.Y. Jezequel "ma'za

ar vizer war greskiñ war ar maez ha ma c'heller kontañ dre gantadoù hirtiv an niver a beizanted n'o deus gwarez sokial ebet ken".

Ha da echuiñ o c'hervel ar c'huzulierien da glask diskoulmoù. Ur galv a rafe mat ar pennoù bras derc'hel kont dioutañ.

"Ma ne teu diskoulm ebet trumm a-walc'h, ne vimp ket ni selaouet ken : re a dud a zo hirtiv n'o deus netra ebet ken da goll...".

Jil Killeverre

UDSEA : Union départementale des syndicats d'exploitants agricoles, savet gant disarannourien an FDSEA, dalc'het mat gant ar pennoù bras.

CNSTP : Centre National des Syndicats Travailleurs Paysans. emezelet nevez-zo er "Confédération Paysanne" a gustum bremañ bodañ an holl sindikadoù bihan koulz lavaret.

luc'hskeudenn O.F.

ILIZ

KRISTENION BREIZH

AN ILIZ HAG AR YEZH

Ouzhpenn 40 a dud a oa en em gavet e Gwengamp, etre ar 16 hag an 22 a viz Eost, o tont eus Iwerzhon, Kemper ha Kernev-Veur, evit emvod bloaz ar gevredigezh "Kristenion Breizh". Ur seurt kendalc'h kristen etrekeltiek eta en abeg da orin ar berzhidi ha d'an danvez studiet ganto.

AL LABOUR E GWENGAMP

Petra o deus graet e-kerz ar sizhun-se ? Dreist-holl, ha da gentañ, o deus klasket bezañ kristenion, da lavarout eo, izilli diseurt an Iliz.

Kanet o deus bemez an o-ferenn ha Pedenn an Iliz, en o yezh, en o yezhoù kentoc'h, seul donoc'h unanet gant ar Pab hag Eskob Sant-Brieg. Bevet o deus a-gevret (etre 20 ha 25 bemez ouzh taol), e manati leanezed sant Augustin Kêrprad. Prederiet o deus war gudenn ar yezhoù en Iliz, diwar div pe deir studiaden bemez : istor emzalc'h ar Stadoù hag hini an Iliz e-keñver ar yezhoù ; istor ha stad ar brezhoneg hervez ar vuhezgezh kristen ; ar yezhoù hep stad, ur c'hañs hag ur bennevit kemm ar gevredigezh ; an Adnevezadur karismatek.

Pennadurezhioù an Iliz e Gwengamp hag en eskopti a oa deuet da welout. Un degemardenn a oa bet e maerdi Gwengamp hag ur pennad bennak war gazetennoù gallek. Skingaset ez eus bet pennadoù-kaoz gant Radio Breizh Izel, gant Radio Kreiz Breizh ha Radio Arvorig.

STAD AR BREZHONEG

EN ILIZ HAG ER VRO


Setu dre vras, ar pezh a zo bet lavaret war ar skingomz. Displeget eo bet da gentañ pe tra a veze graet gant an dud bemez e-pad ar C'hendalc'h-se. Da c'houde eo aet ar gaoz war ziaesterioù a c'hoarvez gant ar

Gristenion a fell dezho bezañ kristenion e brezhoneg : "Chalset omp un tammig o welout ne ra ket an eskibion hag ar veleion dre vras van ac'hanomp. N'o deus ket komprenet talvoudgezh ar yezh evel m'hon eus Komprenet-ni" (hag evel ma kompren ar Pab) : "Marteze eo dre ma n'int ket bet sklerijemet war ar poent-se. O vevañ ma 'a omp kristenion ha kristenion e Breizh, e soñj dimp ez eus un abeg relijiel evit difem ar brezhoneg, n'eo ket hepken evit ar blijadur, pe evit mad an dud -an dra-se eo ivez evel-just, - met ivez eo youl an Aotrou Doue e vije meur a yezh er bed, evel ma z eo liaseurt ar yezhoù, er plant, er mein, el loened hag en dud. Un tammig eko-logourien ez omp. Ne vez ket roet d'ar brezhoneg, gant an dud a iliz, ar plas a zleje kaout e Breizh. Ne rebec'h netra da zen ebet peogwir ez eus kalz Bretoned a zo diseblant oush o yezh, oush implij ar brezhoneg e Breizh ; kalz a zo a-du, met nebeut a soñj e rankont ober eus ar brezhoneg o yezh dezho o-uzh".

"Evit ar pesh a sell an eskibion hag ar veleion, ret eo lavarout memestra ez eus en o zouez kalzig bezañ ar soken eskibion a zo a-du gant ar brezhoneg, met lod evit m'rouz un dra bennak, ha nebeut-tre evit kas ar brezhoneg war-raok evit ma vefe ur yezh ouzhpenn er bed

-evit ma vo bravoc'h ar bed hag ivez evit ma vefe ur yezh ouzhpenn da veuliñ an Aotrou Doue. War ar pleustr ez eus diazezmantou, peogwir e rank ur c'hristen, da skouer, mont d'an ofereñn bep sul. Ha neuze e vez ret dezhañ mont d'an ofereñn e gallec. N'eus ket tu d'ober a-hend-all. N'eus nemet e brost e oes a-drugarez d'an aotrou roet gant an Aotrou eskob Barbu, un ofereñn bep sul. E Kemper e vez ivez ur wech ar mix, evel e Roazhon hag en Oriant, hag en un nebeut leo'hioù all."

"Met dre vras, ar vrezhonegerien, ar re a fell dezho bezañ brezhonegerien, eo ret dezho kaout ur o'harr-tan evit mont d'an ofereñn pellik a-walc'h. Ar pesh n'eo ket reizh. Ouzhpenn-se, evel-just, an ofereñn zo un dra vras. Met n'eo ket a-walc'h : n'hon eus ket a gatakierezh, ne vezomp ket kelenner e brezhoneg, en hon yezh -ni, n'hon eus ket bezañ ar-rouz evit ober war hon tro. Ar Bortugaliz, da skouer, pe an dud diroet, -ni zo diroet en an dud diroet, -ni zo diroet en Portugalieg, daoust ma ouont galleg evit o labour. Ni ivez a oar galleg evit hon labour, met o'hoant hon eus da bedañ an Aotrou Doue e yezh hon c'halon, ha neuze e kav dimp e vije reizh d'an eskibion, mar selloc'hant RRI, ober un dra bennak. En eskobarn Kemper ha Leon ez eus un dra bennak a zo bet



Bremañ 13

ILIZ

graet gant an Aotrou Barbu : Minic'hi Trelevenez. Goulnet en deus an Eskob sevel ur greizenn gatolik ha brezhonek. Hag eno e vez ur vuhez vrezhonek ha kristen bemdez Doue a-hed ar bloaz. A-hend-all, dav eo anaoz eo gant ar veleion eo bet miret ar brezhoneg evel yezh skrivek ha yezh an deskadurezh relijiel e-touez ar bobl, betek m'o deus al lodenn vrasañ eus an dud gouezet galleg. N'eo ket an Iliz hepken he deus distrujet ar brezhoneg. Nemet d'am meno-me, roll an dud a iliz n'eo ket hep-ken mont da heul an tropell, met kerzhout a-raok.

"Ar veleion hag an eskibion a labaro din, n'eo ket o roll, o roll, hervez, eo an e-vel. D'am meno eo ur pec'hed a reont, e ster na z eo ur pec'hed ur mank, hep gouezet dezho, marteze, met ur pec'hed memestra."

"Petra eo ar pec'hed, nemet mont a-enep da youl Doue ? Petra eo youl Doue o krouñ ar Bed, nemet kreskit ha liesait ? Gouro hemenn kentañ ar Bibl, ha tra anat e bed ar fizik. Met an traoù anatañ eo na vezañ ket gwelet, dreist-holl gant an "intelektual".

"Petra ober neuze ? Kunajemañ ? Ne gav ket din. Sklarijennañ kentoc'h ar re a zia distkouez an hent, lavarout dezho youl Doue war ar poent-se, menegiñ komzoù Doue diwar-benn ar broadoù hag ar yezhoù er Bibl, menegiñ komzoù penna-durezhioù an Iliz a-du gant al lies-yezhegezh. Ha dreist-holl, dreist-holl BEZAN. Bezañ kristenion e brezhoneg, en em strolañ e-vel kristenion e brezhoneg. Setu penak e oa bet savet gant Madaez Glanadour kevredigezhioù evel "Ar Bedenn evit ar Vro" hag an "Unvaniezh Speredel". Setu perak eo bet savet, 13 vloaz '80, ar gevredigezh anvet "Kristention Breizh" hag a geniale'h da vodañ bep miz ha pemzektez bep bloaz, kristenion a fell dezho bezañ kristenion a-gevret en o yezh dezho o-unan".

Boas eo izili ar gevredigezh "Kristention Breizh" da vont, abaoe daouzek vloaz, da dremen ur sizhunvezh pe ziv bep hañv, e hini pe hini eus ar broioù keltiek tramor, evit kejañ gant stourmerion a fell dezho, int ivez, bezañ kristenion en o Yezh hag en o Sevenadur.

KELENN

E'BRO BARIZ

Renket eo an traoù gant Serj Richard, ar c'helenner brezhoneg en Akademiezh Versailles, a oa bet anvet evel kelenner galleg e Lille, hag a oa o vont da gregiñ gant ur yun-enebiñ : oc'h adkregiñ emañ gant e gentelioù brezhoneg e Plaisir (78) Massy (91) ha Nanterre (92). Nemet klask a reer e entiliañ war ar galleg pa c'houlenn bezañ entitlet war ar brezhoneg (hervez reolennoù diabarzh melestradurezh an Deskadurezh-Stad e c'haller bezañ anvet "A.E." brezhoneg abaoe ma 'z eus ur c'hap-es brezhoneg" hag unan zo bet anvet evel-se e Breizh dija). Stourm a ray Serj evit gontit war an dachenn-se ivez.

Gant Ronan Tremel avat n'eo ket bet biskoazh ken fall an traoù : emeur o c'hourdrouz e skarzhañ na mui na mæs. Hag eñ da gelenn nemet brezhoneg abaoe 10 vloaz, e oa bet anvet "A.E." saozneg pa ne oa ket c'hoazh ar g-"Capes brezhoneg" (daoubennek) ha pa oa gantañ un aotregezh saoznek a-hend-all. Ha bremañ e c'houlenn outañ mont da gelenn saozneg e div skolaj, da laret eo e c'hortozer anezhañ da zilezel kelenn ar brezhoneg, ha n'emeur ket e sell da lakaat unan all (piv?) en e lec'h. Mouañ hon yezh, a-mañ pe ahont, sêde o folitike-rezh pennek ha padus.

Nac'h kelenn saozneg a ra Ronan. Prestik marteze e vo dilabour. Di ja e oa bet klasket e lakaat da reiñ e zilez ; e gas da gelenn saoznek e-maez Pariz ; e envel da gelenner fizik ; e envel en ur skol vañsonerezh ; e baeañ hanter-amzer pa labourer amzer leun ; ha mirout outañ da vont tre er skolioù warlene, ken e voe graet kentelioù war ar straed hag e porzh-houarn Montparnasse.

Goulnenn a ra Ronan diganeoc'h skrivañ d'ho kannad, pouezañ war ar Ministr, evit ma c'haller adkregiñ gant e labour ha na vefe entitlet e brezhoneg ha neket e saozneg.

Goulnenn digant ho kannad kas ur "goulnenn dre skrid" d'ar Ministr evit ma vefe embannet e respont e "Kazetenn Ofisiel ar Republik Gall". Skoazell d'ar stourmerien.

LISE RENAN

E SANT BRIEG

Setu emañ da heul lizher Raymond ar Bakon, kelenner war ar brezhoneg e Lise Renan, e Sant-Brieg. Diskouez a ra splann deomp stad ar c'hentelioù brezhoneg en e lise, evit ar bloavezh 1987/88.

Kensiled ker,

Penaos emañ kont gant ar c'helem brezhoneg er skolioù er bloaz-mañ ? E-barzh ma lise ez eus tost da saou c'hamt (200) skoliad enskrivet evit ar c'hentelioù brezhoneg.

Met ne vo ket tu d'an hanter dioute da heuliañ ar c'hentelioù. N'eo ket ast sot ar velestradurezh c'hoazh!

Warlene em boa un daou-ugent bennak el lise ; ober a raen 9 eur ; er bloaz-mañ n'em eus nemet 8 eur...

Galvet oan bet, koulskoude, da Rektori Roazhon, evit bout gourdruset gant an A.O. Kloareg, a zo tost tre d'ar Rektor, dre ma ne raen ket trawalc'h evit ar brezhoneg...

Petra c'hortoz evit reiñ eurioù ouzhpenn ? N'eus ket diouer a argant peogwir 'ba skolioù zo n'eus ket nemet pevar pe bemp skoliad o heuliañ kentelioù brezhoneg.

N'eo ket mat ober re war-dro an danvez-se. Ha n'eo ket ar re a ra ar miañ war-dro ar brezhoneg a vo notet mat.

Laret 'm eus da ma rener e tlefen bout e "grand choix" gant niver ar skolidi a zo enskrivet 'barzh ma lise er bloaz-mañ.

Ne ra, betek-hen, nemet tennañ kuit skritelloù in-plij-ammer ar c'hentelioù brezhoneg ; evit-se ne vo ket tu d'ar skolidi gouzout pegoutz na 'barzh peseurt sal 'vo kentelioù brezhoneg.

Setu stad truezus ar c'helem brezhoneg e Sant-Brieg.

Kenavo deoc'h.

Raymond ar Bakon

SKOLIOU PUBLIK DIVYEZH EK 42 BUGEL OUZHPENN

HAG E LEC'H ALL?

Penaos emañ kont gant kelenn ar brezhoneg emañ hag ahont ? Sede ez omp prest da embann... gant ma vo kaset deomp keleier gant an dud

Pevar den bet tapet o "C'HA-PES" gante a zo krog da labourat da vat. Unan e Kemper, unan an Oriant, unan e Gwened hag unan all er Faoued. Siwazh n'omp ket evit lavarout muioc'h, nemet n'eo ket gant ar brezhoneg e ya o holl amzer. Ha skrivañ a reoc'h dimp, paotred ?

Tri den all a zo gant o bloavezh staj : unan e Roazhon, unan er Gemene, unan all e Lannou. An hini zo e Roazhon zo e-unan e Skolaj ha Lise Zola, pa oa daou stajiad eno warlene : ne-beutoc'h a eurioù brezhonek eno eta : an arakoad !

Koulskoude, er skolaj Zola-se ez eus ur verc'hig, bet e DIWAN, hep skol vrezhoneg, er 6vet klas. D'ar c'helenner ez eus bet laret ne oa skoliad ebet. Deziñ e oa hec'h-unan. Pa anavez ur bugel all enskrivet, c'hoant gant e dud e teske. Mignoned d'hon yezh eo ar renerien !

E div skolaj all ez eus daou vrezhoneger all n'eo deus ket skol vrezhoneg. E klasoù nevez an 2vet klas e "skolaj" gozh Anna Vreizh ne vez ket kelennet ken brezhoneg. Mat an traoù, a laromp deoc'h.



kinnig labour

Er skolioù prevez e Roazhon e kinniger : eus miz Here 87 da sizhun da skolidi ar vachelou-riehz. A-benn miz Gwengolo 88 : 9 eurvezh brezhoneg ar sizhun.

SKRIVAN D'AR GAZETENN EVIT GOUZOUT MUIOC'H - 8, straed Hoche-



Luc-Hsk-keudenn Lena Louarn

Pemp skol, 10 klas, 170 bugel a oa warlene en Deskadurezh-Stad. Er bloaz-mañ emaoomp gant 6 skol, 13 klas ha 212 bugel :

- 71 e Lannou (skol-vamm - CM1)
- 57 e Roazhon (CP-CM2), hep kentañ ar c'hentelioù er skolioù-mamm.
- 27 e Rostren (skol-vamm - CP)
- 24 e St Riwoal (CP - CM2)
- 19 e Pondi (skol-vamm - CM2)
- 14 e Kawan (skol-vamm ha CP).

Aet eo an traoù war-raok, gant klasoù nevez e pep lec'h ha gant ar skol nevez e Kawan -E Aodoù-an-Hanternoz eo a-drugarez da daou bost skolaer eus ar Ministr.

Diskouez a ra sklaer e talvez ar boan d'ar familhoù pouezañ war an Deskadurezh :

- + War dachenn ar gwir (ar rekedoù dirak al lezvarn velestradurel ne blijont ket kalz).
- + E-touez an dud : gwellañ tra d'ober eo bodañ un dek pe bemzek familh en ur skol en ur barrez pe en ur c'hanton war-lerc'h un enklask, a-raok kas

ur goulnenn. (Ha kenkoulez kregiñ ganti diouzta a-benn 1988).

Ouzhpenn-se emañ ar Rektori o plediñ gant ar programoù ha gant stummadur ar skolaerien : ur staj hir a zlefe bezañ savet er bloaz-mañ digor d'an holl skolaerien en Akademiezh. A-benn 1988 ivez e vo bugale Roazhon e oad da vont en Eil Derezh.

N'eo ket purvat pep tra memestra. Da skouer, e Roazhon n'eo ket bet gwelet o skolaer gant bugale (100) an teir skol-vamm e kreiz-ker, doust ma oa bet kemennet e vefe vak ar post-se, e miz mae diwezhañ. (Ur reked a zo bet kaset evit-se d'ar C'huzul-Stad). E Penn-ar-Bed e vank mistri-bale evel warlene. D'ar gerent da zifenn o gwirioù. ■

Sekretour an A.P.E.E.B.

Bep bloaz e vez skignet un 10 000 bennak a baperoù bruderezh hag amezelañ gant an APEEB er skolioù ma vez desket brezhoneg. Ma n'hoc'h eus ket gwelet anezho, goulnenn digant APEEB B.P. 2507 -35025 ROAZHON Cedex-

KELEIER

KLASOU DIVYEZHKEH	SKOL NOZ	SKOL UHEL AR VRO
<p>Souezhus a-walc'h eo bet lenn er gazetenn komzoù an En-seller Akademiezh, brudet betek hen evit bezañ un enebour touet d'hor yezh, (kan e oa bet enoret gant ur Vuoc'h Aour warlene). Laret en deus an Aotrou Dekeyser e vije kendalc'het gant an divyezhegezh en Eil Devez, hag e vije aozet stajoù stummañ evit ar skolaerien. Ret e vo dezhañ hastañ buan eta, rak betek-hen n'eus ket kaoz a staj ebet e-kerz ar bloavezh-skol-mañ.</p> <p>Er skolioù-stad eta, hag e re Bro-Dreger dreist-holl, e ya war-raok un tammig ar c'hentenn brezhoneg, pa chom treut er skolioù katolik (hag ezvezañ penn da benn er c'hentañ dezvez !). E kêr Lannuon eo 110 bugel a zo o studiañ brezhoneg e klasoù ar skolioù-stad ha re DIWAN, etre skol-vamm ha kentañ derez.</p> <p>Yann Leskildri.</p>	<p>Setu amañ roll ar c'henteliou noz a vez graet gant Kelc'h Sevenadurel Gwened er bloaz-mañ. D'ar Meurzh eus 6e30 da 8e noz (deraoudi KLT), eus 8e30 da 10e noz (2 gentel) sal 21 stradaen Tiar-Barn.</p> <p>D'al Lun 6e30/8e noz eil bloavezh gwenedeg, meurzh 8e30/10e noz eil bloavezh KLT, live uhel d'ar Gwener 6e30/8e noz. En Institut Consulaire, 17 ru Pasteur.</p> <p>Kenteliou noz a vo ivez e Roazon adalek fin miz Here gant ma vo kavet trawalc'h a gelennerien... Kroget vo evit ar mare gant 4c'hentel. Div gentel evit an deraoudi da 6 eur abardaez hag 8 eur noz, ha div gentel evit an eil bloavezh da 6 eur abardaez ha da 8e30 noz, d'al Lun, Meurzh, M'erc'her ha Yaou.</p> <p>Klask zo warlerc'h unan bennak evit kenteliou an trede bloavezh ha marteze un all evit deraoudi tout.</p>	<p>D'ar 24 ha d'ar 25 a viz Here, e Brehan (etre Josilin, Pont-lvi, ha Loudieg), GOUEL AR MICHERIOU A DENN D'AL LEVRIOU, Titouroù digant Ti-Kêr Brehan, 56580 - Rohan -</p> <p>D'ar 30 a viz Here ha d'ar 1añ a viz Du, e Montroulez, 3VET SALONS AL LEVRIOU ISTAR, en tiskêr. Titouroù digant Embannadurioù an Dosem -Ti ar re Yaouank, plasenn an Dosem, 29210 Montroulez. Pg.98.88.09.94.</p>
<p>BEP DAOU VIZ LENNIT</p> <p>AL LANV</p> <p>59, hent</p> <p>KERDRONOU VIHAN</p> <p>29000 kemper</p>	<p>PELEC'H E VEZ SKOL VREZHONEK ?</p> <p>Kasit kelou dimp</p>	
<p>TI AR BREZHONEG E PARIZ</p> <p>Ya ! Bez e vo un oaled brezhonegerien e Pariz ! En 20vet arondisamant. Evit gouzout hiroc'h gwelout Mark Gwilhou, 100 rue Parmentier, 78800 Houilles (P.39.68.28.98.)</p> <p>A-RAOK LENN CHOLORI.</p> <p>GOULENNIT AN AOTRE DIGANT HO PUGALE !!</p>	<p>Un toullad tud bet tapet gante o aotreegezh (kelenn !) war ar brezhoneg o deus nac'het ober skol. Klask a zo eta war an dud a volentez vat.</p> <p>KASIT DIMP KELOU eus ar skolioù brezhonek digor er bloaz-mañ. E Skol-Veur Pariz VIII e adkrog ar skol. E Villenoble (93), Plaisir (78), Nanterre (92), Enghien (95) ivez. Evit gouzout hiroc'h pellgomz : 46.06.89.67.</p>	<p>D'ar 27, 28 ha 29 a viz Du, e Felger, e kreizenn an Urbanisted, 3VET SALONS AL LEVRIOU EVIT AR YAOUANKIZ E BREIZH. Titouroù digant an Ao.Marc Baron, animatour evit al levrioù. Tiskêr -35300 Felger- 99.99.18.98.</p> <p>D'ar 5, 6 ha 7 a viz C'hevver 1988, en Naoned, e Park an Diskouezadegoù er Baujoire, 3VET GOUEL AL LEVRIOU EN NAONED. "Tro ar voull-douar gant 20 000 le-vre" (ar wech-mañ : Arc'hantina hag Uruguay). Titouroù digant Festival du Livre de Nantes, 1 bis ru Camille Berruyer, 44000 NAONED- Pg: 40.35.39.36.</p> <p>D'ar 5, 6 ha 7 a viz Meurzh 88 e Sant Brieg, er Greizenn obererezh sevenadurel, 8vet GOUEL AL LEVRIOU E BREIZH (danvez : ar Merc'hed hag al Lennegezh). Titouroù digant an itron Nicole MEYER-VRAY, levraroeg-kêr, 44, ru ar 71vet RI 22000 Sant Brieg Pg. : 96.61.29.33. post 324.</p> <p>D'ar 27 ha d'an 28 a vezheven e Sant-Malo, e Palez ar Mor Bras 8vet GOUEL AR BANNOU TRESET ; (danvez : ar romant-polis). Titouroù digant an Ao. Jacques PLUJET, Ti an Holl/MPT, plasenn Bouvet 35400 Sant-Malo Cedex - Pg. : 99.56.41.36. post 7431.</p>

KELEIER

AR BAOL KONTAMM AR GUICHARD	SKINWEL-LAER
<p>D'an 12 a viz Gwengolo ec'h embanne Ouest-France e oa kontammet pleg-mor ar Baol ! Anavezet e oa stad an traou gant Renerezh ar Yec'hed (DDASS), an IFREMER (an aozadur a ra an dielfennerezh) hag an dilennidi abaoe... ar 26 a viz Mezheven. Nemet ne felle ket d'an dud vat-se spontañ an dou-risted hag o gwelout o skampañ kuit da rouzañ da lec'h all. Gwell o deus kavet eta o c'hontam- mañ gant prediioù ar vro... hag hini ar vedisined ivez moar-vat. War c'houllenn an dilenni- di eo eo chomet mut kargidi an DDASS : ne greder ket nac'h tra ouz un den ken galloudus hag an Aotrou Guichard, maer ar Baol ha penn Kuzul Rannvro ar Peyi- deolar. Ac'hanta, Aotrou Guichard, ha kregin ar vro hoc'h eus debrat e-pad an Hañv ?</p>	<p>Setu neuze un hantereur skinwel, pe skingomz, mar karit ne servij da netra. An abaden- nou skinwel gallek ar Sadorn a grog etre 7 eur ha 9 eur hag a echu war-dro 1 eur, lakomp 17 eur x 5 chadenn (na gontomp ket ar pevare) = 85 eurvezh, evit un 1/2 brezhonek. Lieskementiñ dre 7 a ranker evit ur sizhunvezh : 595 eurvezh c'hallek met 1 eur ouzhpenn hepen evit ar brezhoneg (ar Sul) : 1,5 / 595 !!!</p> <p>D'ar Sadorn e c'hall al lennerien o deus ur skinwel- zerezh arvestiñ ouz an "Taol Lagad", un abaden a ge- leier brezhonek, etre 12e ha 12 e30 war FR3. Nemet an Naonediz evel hon eus bet skrivet dija.</p> <p>D'ar Sadorn ivez e c'hall al lennerien o deus ur skinwel- zerezh selou abaden Mikael Baudu "Du-mañ, du-hont", etre 12 ha 14 eur war ar gwagnennoù krenn (Medium Wave, e galleg, 422 metr). An Naonediz ivez, hag ar Barizianed a gar ouzhpenn moarvat.</p> <p>Nemet n'haller ket heu- liañ an daou : klasket em eus, ha n'on ket deuet a-benn, ouzhpenn-se am boa poan o troc'hañ ma skejenn giv bevin sul gant un gontell ken bouc'h ha spered un adjutant gall.</p>
<p>KELAQUINN</p> <p>36-15</p> <p>TC / KELA</p> <p>31 455</p> <p>31 455</p> <ul style="list-style-type: none"> - Kalkul ar vro - Gweldik, Fuzik nos - - Levrioù sarvez embannet - Skol Uhel Ar Vro - C'Hezhoù - Kentellou brezhonek 	<p>Abadennoù skingomz gallek ar Sadorn a grog da 7 eur, lakomp (skingomzvaou zo a skingas- dizehan) betek 1 eur ivez, lakomp. Amañ n'eo ket 5, met 10 "chadenn" skingomz a ranker kontañ da vihaned e Breizh gant an FM, hervez al lec'hioù. Ma, lakomp 17 eur ivez x 10 = 170e. E brezhoneg : 2 eur sizhuniek Radio Arvorig klevet e pep lec'h e Breizh, mui eurioù Radio Breizh Izel (evit un hanter- tag eus ar Vro nemetken), lakomp 2 e x 7 devezh = 14 eur, (+ eurioù brezhoneg er skingomz- vaou-bro, Radio Kreiz Breizh.. na vezont ket klevet e pep lec'h eveljust), ma ! 16 eur ar sizhun (evit ur C'hernevad) pe 2 eur ar sizhun (evit ur Roazonad) ! Etre 16/170 ha 2/170 eta, gwelloc'h eget gant ar skinwel memestra.</p> <p>Forzh pegen izel ar si- froù eo ret digreskiñ anezho c'hoazh, rak 1 eur 30 skinwel + 2 eur skingomz ne reont ket 3 e 30, e brezhoneg. Ar selouer -arvester a rank dibab koll 0,5/3,5 eus ar programoù brezhonek, ur 1/7-vedenn eta eus an abadennoù fonnus a zo en e yezh. Trugarez da FR3 ha Radio Arvorig.</p> <p>Y.L.</p>
<p>NITRAT</p> <p>Dont a ra war-raok nitra- tiñ an dour da evañ e Breizh. Ne dlefe ket an dour euet gant an dud bezañ muioc'h a 50 miligramm nitrat dre litrad ennañ. Hervez an DDASS (Renerezh ar Yec'hed) Ar- vor an Hanternoz ez eur tremen- net dreist ar c'hementad-se e meur a lec'h. Souezhusat tra, goulennerien a ra an DDASS, evel holl dielfennerien an natur, ne ve ket klasket kuzhat ar gudenn gant diskoulouñ teknikel koustus, a- seurt gant labouradegoù dinitra- tiñ, evel e Bro Leon. Kouls- koude, nitrañ ha dinitrañ, kement-se a lak an ekonomiezh da vont en-dro, ket ?</p>	<p>MICHELIN</p> <p>Manufacture Française des Pneumatiques Michelin 48, Avenue de Bretagne 75341 PARIS CEDEX 07</p> <p>Nous sommes bien reçu votre lettre du 20 août et vous remercions de la suggestion que vous avez eu l'amabilité de nous adresser.</p> <p>Nous n'envisageons pas, actuellement, d'adopter la double toponymie, sur nos cartes routières couvrant la France.</p> <p>Le bilinguisme au Pays de Galles, au Pays Basque espagnol ou en Catalogne, n'est pas comparable. Les langues de ces régions sont reconnues langues officielles et la signalisation de ces provinces tient compte totalement et légalement de ce fait. En Bretagne, elle semble bien sûr, se mettre en place mais très progres- sivement et sans suivi homogène.</p> <p>Vos observations ont retenu toute notre attention ; elles seront pour nous des fils conducteurs pour nos études et la poursuite de nos enquêtes.</p> <p>Très sensibles à l'incrédit que vous portez à nos publications, nous vous prions d'agréer, Monsieur, nos salutations distinguées.</p> <p><i>Michelin et ses</i></p>

DUDI

TRO BREIZH KERGRIST

KLOUN PENN-MEDISIN

Dont a ra en-dro Jean KERGRIST war leurennoù, e-barzh salioù pe tachennoù a-bep seurt Breizh, gant ur penn nevez : "ar C'HLOUN-MEDISIN".

E-pad tri bloaz bennak eo chomet tost dilavar er vro. Aet eo da c'hoari en estren-vro, e Bro-C'hall hag en Europa a-bezh amzer d'an dud da zisoñjal skeudennoù en deus diskouezet gant kement a verz arak : "ar c'hlon atomel" hollvudet e pep lec'h, "ar c'hlon labourer-douar" o treuziñ avanturioù Alexis Gourvenec, "ar c'hlon informatik" hag "ar c'hlon kojema".

Gant ar "C'hlon penn-medisin" eo eveljust eus ar vedisined hag ar medisinezhez e ra goap. E-pad pell e vezer o c'hortoz ar penn-medisin aet d'ur veaj-studi er Balear profet gant ul labouradeg louzou.



Pa zeu en-dro eo predieriet kalz muioc'h gant e enklaskoù, ar prezegennoù a ra amañ hag a-hont, eget gant yec'hed e glañavourion. Ar re-mañ a vez ankounac'haet war an daol operata pe a vez roet dezho da lonkañ louzeier a bep seurt evit pareañ an droug graet gant louzeier all.

Ouzhpenn 100 a dud a oa d'an 9 a viz Here e Kemper evit c'hoarzhin o sellout outañ. Ha, koulskoude, n'eo ket degemeret mat gant tud ofisiel ar sevenadur e Breizh. Nac'het eo bet e CAC Sant-Brieg hag e Ti Sevenadur Roazon, tra m'eo bet war leurennoù Skol Uhel C'hoariva Kopenhagen pe c'hoariva rouel Brusel.

Met berzh a ra a-hend-all. Un abadenn nevez da welet hep mank ebet. ■

KELTIA ROK

Setu ur bladenn a vo kavet e gwerzh e Breizh dizale. Peder c'hanaouenn vrezhonek a gaver enni ar pezh a zo un drugar ken rouez ma vez hevelep burzhud. Diouz Bro Gembre e teu deomp ar bladenn, Davyth Fear, ur c'herneveurad o chom e Kembre en deus lakaet en e sonj sevel ur bladenn etrekeltiek... gant kanaouennoù rock.

Deut eo a-benn gant e daol ha skignet e vez ar bladenn gant an ti SAIN... o c'hortoz ma vefe kavet ur skigner e Breizh. Ouzhpenn kanaouennoù Rock a gaver er bladenn avat. Gwir eo, estregret Bro Gembre e lec'h ma kaver forzhik a strolladoù Rock ne vezer ket stank o kanao Rock er yezhoù keltiek all...

Dizingal eo liver ar bladenn ivez. Strolladoù mat a zo evel E.V. (Breizh), Eirin Peryglus (Kembre) pe Rinne Mamaï Ciste Milis (Eire). Re all a zo dister avat evel "Gael Force" (Bro Skos).

Souezhet e voc'h marteze o klevet "An Gof" ur strollad

kerneveurek eus... Manchester. Kanañ a reont doare "The Doors" gwechall (ya dija !).

Tu zo da venegiñ "Dazont" ur strollad eus Pariz a ginnig ur c'han dereat evit un dro gentañ. Met gwelloc'h a reont dija...

Kanaouennoù 'zo n'o deus netra da welet gant ar Rock avat... Ne vir ket ouzh lod anezho da vezañ interesant. Gant kanaouennoù Mona Jaouen ha Pentothal e santer levezon ar Jazz da skouer. Dishañvel tre an eil diouzh eben avat. Gant Pentothal e Klever mouezh raouliet Bernez Tanguy oc'h heuliañ ul lusk gouez en ur zistagan gerioù gouesoc'h c'hoazh. Plijout a ra pe ne ra ket, met souezhiñ a ra. - Skrid ar ganaouenn-mañ a gavoc'h asambles gant meur a varzhoneg all en un teskad barzhonegou nevez embannet gant SKRID ha Mouladurioù Hor Yezh "Fulennou an Tantal" - Doare Mona Jaouen a zo boutinoc'h avat, he mouezh a zo atav ken kaer met un tamm "boyskout" e c'hell

bezañ kavet gant lod. Din-ne ne zispilij ket re ar ganaouenn avat !

"My Slommaghyn" a zo ur strollad eus Enez Vanav. Brav tre e teu-gante o c'hanouenn o vannine, un doare folk a zo war ar strollad peurvuiañ met aze ez eus bet klasket ober un dra dishañvel ha deut eo gante. Lusk a zo hag ur vouez dispar dreist-holl, hini ar c'haner.

Strolladoù all a zo c'hoazh, lod anezho a zo interesant. Mouezh Brian Webb da skouer he defe talvezet ar boan bezañ heuliet gant ouzhpenn ur gitar, re abred e aet ar c'haner da anaon siwazh. Evit re all avat, evel Blasket Sound e vezer troet da ganañ "E kêr Is n'eus netra nevez". Geo, just a-walc'h "pa 'z eo ken foll ar yaouankiz" ez eus anv da gaout Alan Stivell ha Runrig war "Kel-tia Rok" ar bloaz a zeu. Met gortozit n'eus netra sinet evit ar poent. ■

Yann Pennhaleg

DUDI

PROFOU

DUDI = MERC'HER

E vit an eil bloavezh e vo digoret Kreizenn Bugale digoret Merc'her, "DUDI", e Roazon. Kreizenn DUDI zo bet krouet evit ma c'hellfe ar vugale c'hoari, divizout, koutañ, kanañ, dizoleiñ, krouiñ e brezhonañ. Keñañ gant brezhonegerien vihan all, ha bevañ traoù di-shañvel deus bed ar skol pe deus ar vuhez familh. Degemeret e vez ar vugale bep merc'her eta, etre 1 eur 30 ha 5 eur 1/4. Digor eo d'ar vugale etre 5 hag 11 vloaz.

penn-se gant DUDI, estregret degemer ar vugale bep Merc'her : un dibenn-sizhun en ur c'hastell e miz Kerzu, 2 devezh war ar maez d'an Nevez Amzer, ur gouel a-raok Nedeleg, savet penn-da-benn gant ar vugale h. a. h.a. peadra da gaout plijadur ha da gomz brezhoneg asambles dre ar c'hoari hag an dud...

Titouroù digant Skol An Emsav
8 ru Hoche Roazon - 99.38.75.83

Raktresoù all a zo ouzh-



Pourmenadenn dibenn-bloaz bugale DUDI e Sant-Malo

Luc Izkouenn, Lena Louarn

- PENADOS SIKOUR BREMAÑ ?
- 0 komanantiñ hag adkomanantiñ.
 - 0 klask komanantoù nevez.
 - 0 kas disp pennadoù pe skeudennoù.
 - 0 vezañ kenskriver reoliek.
 - 0 kas disp arc'hant.

- PROFOU
- Philippe Lanoe 30 l., Jean Jestin 30 l., J.Y. Le Goff 30 l., Bernes Kadoret 30 l., Yves Rosmorlec 30 l., Marjon Mc Donald 30 l., Reun Treger 80 l., Per Peneg 80 l., Fanch Jestin 80 l., J.A. Salañ 80 l., Kerredigezh Minihel Levenes 30 l., Gweltas ar Bihan 30 l., Daniel Kernalegen 30 l., Vefa de Belkaling 50 l., Reun Allain 30 l., Lukian Kergoat 30 l., Perig an Digerc'her 30 l., Lukian Raoul 30 l., Per Dresen 30 l., Roland Vermisseau 30 l., Yann Guiche-teau 30 l., Jakes Merel 30 l., Erwann Denes 30 l., Jean Boulbria 30 l., Yann Mikale Mocaer 180 l., Aline Vorc'h 30 l., M. Françoise Lestic 30 l., J. Michel Hahé 80 l., Gwenaell Diquelou 30 l., Andree Petton 30 l., Klaod an Duigou 30 l., Itron Lavanant F. 30 l., Didier Jegou 30 l. HOLLAD = 1560 lur.

■ **J**ama ha tamm e vez graet e vragoù da Yann. Pa reer kont ar profoù bihan e teure da gaout ur yalc'hadig a-feson... En ur ober 5 miz eo bet profet deomp an hanter eus frejoù moulañ ezhom bras eus ho skozell evit lasañ ar jilsetenn pa vez dale gant yalc'hadoù ar penndurezhioù pe va vezont digresket... Brest e chom hon c'helouenn, zoken ma kavet anezhi en ho pouest-lizhiri bep miz.

Trugarez deoc'h holl 'ta. Met gwir eo, ezhom hon eus c'hoazh eus skozell hon c'houtmananterien ! ■

BARZHONIEZH

CISKEI, AFRICA

Skarzhed on bet er-maez
 'n'as eus ket ho kwelet
 'n'as d'an homeland
 'n'ay coin in my pocket
 'n'gaout bod ha boued.

■ Klask a ran ur banne dour
 'n'gold and ruby n'int ket 'vidon
 'n'fran' reont en o chakodoù
 'n'merc'hed gwenn o vale
 'n'balioù gwenn ha keppenn

■ Bredañ a ra an heol berv
 'n'dizerzh 'lec'h ma guzhan
 'n'ouzoep ket ma bevañ ennañ
 'n'wezhañ 'ray un avel start
 'n'ar ar ger vras broañ.

Mari.E.PIER

AN DUCHENN HUD



KAFEDI-TI KRAMPUEZH
 abadennoù-noz
 A-BEP SEURT
 Abadenn adalek 9 e noz
 GWENER 31 A VIZ HERE

gant **GILLES SERVAT**

Etne ROAZHON ha DINAN (ul lec'h plijus, degemer e brezhoneg, da 25 mn eus Roazon [1])

ADSAV AR YEZH

UR YEZH NA VEZ KET DESKET
 A ZO TONKET DA VERVEL
 UR YEZH A VEZ KELENNET
 A GROG DA ADSEVEL

DIGORIT KLASOÙ BREZHONEG
 en ho kêr, en ho labour, ho ti !

MESK DIVESK

Difluskañ a ra levrioù diwar-benn ar c'hreizennoù nukleel er mare-mañ :

- "Tchernobyl-sur-Seine" gant H. CRIE hag Y. LENOIR (Albin-Michel emb.) a zo anezhañ un doare romant-enklask a-zivout ur gwallzarvoud o c'hoarvezout en NOGENT, er greizenn nevez lakaet en-dro gant E.D.F.

- "Tchernobyl, La guerre des rumeurs" gant Y. LECERF hag E. PARKER (PUF emb.) a vez bruderezh diwar e benn en doare-mañ : "2 zen pe daou vil den lazhet ? nann, 31... Afer Tchernobyl : un afer dreistordinal a zistroerezh-kelaouiñ dielfennet amañ en ur studiañ an troc'h etre an darvoudoù hag ar "mediagate" bedel".


Roet eo an ton : arabat studiañ an darvoudoù, arabat klask kompren anezho, gwelloc'h pismigellat war an doareoù-kelaouiñ, ar vrud atizet, hervezo, gant ar Stadoù Unanet koulz ha gant an URSS o klask a-gevret distroadañ nerzh Bro-C'hall war dachenn an nukleel!

Hervez Lecerf ha Parker eo daskorus meurbet ar program nukleel gall ha ret eo derc'hel dezhañ ivez abalamour ma vez mezeged, enklaskerien, teknikourien a-leizh o labourat war e-dro.

N'eo ket souezhus ar bruderezh a vez graet evit al levr-se, eta. N'eo ket ur souezh kennebeut deskiñ eo bet ijinourien er C.E.A. (Commisariat à l'Energie Atomique) an daou skrivagner.

- "Tchernobyl, Anatomie d'un nuage" (Emb. G. Lebovici, Champ Libre) a zo ul levr dizanv, istitlet : "Roll diechu heuliadoù gwallzarvoud ar 26 a viz Ebrel 1986, war an dachenn fizikel ha divezel (moral).

Amañ ivez ez eus kaoz eus kelaouennerezh (met en ur venegiñ ar sekredoù-stad koulz e broioù ar Reter hag e re ar C'hornog) hag eus sorc'hennerezh ar media : "An holl a ana-vez doareoù hor c'hevredigezh, hag unan eus elfennoù pouezusañ he program a zo genaouegiñ ar muiañ posubl e sujidi e stumm gopridi, bevezerien, ha vote-rien, hep diodiñ anezho kement ken e vefent divarrek da labourat..." (p.77).




Ur bern skouerioù a vez roet el levr, e-touez pennadurezhioù ha kargidi (Pellerin pe Madelin) hag e-touez arzourien (evel Y. Montand ha M. Duras)..

Met kregiñ a ra al levr gant sifroù ha displegadenoù diwar-benn an nukleel ha Tchernobyl, en ur vodañ studiadennoù a-leizh eus meur a vro : gant an ONU eo bet anzavet e 1980 e oa bet taget ha lazhet 150 000 den gant ar c'haign-bev abalamour da skinoberiantiz an tarzhadennoù nukleel eus 1951 betek 1976 da skouer. Ha kement a dud a vo taget gant ar c'hleñved-mañ en abeg da Tchernobyl.

Meneget e vez ez eus bet savet 300 kreizenn nukleel war ar blanedenn betek-hen hag e c'hoarvez 6000 "darvoud bihan" bep bloaz ganto.

Digaset e vez da soñj en-dro ivez e c'heller tremen aestre hep an teknik-se evel ma ra broioù Aotria ha Sveden.



Anaout a rit penaos emañ kont gant an asurañsoù e-keñver kreizennoù nukleel E.D.F. ? 1,2 miliard a zollaroù en doa kous-tet gwallzarvoud Three Mile Island, 5 miliard en defe kous-tet Tchernobyl (ma vefe bet digollet an holl taget gant ar skinoberiantiz), da lavarout eo 20 gwech muoc'h eget na c'hell-fe paeañ an embregerezhioù asurañsoù amerikan.

E Bro-C'hall, ez eus ur "pool" asurañsoù evit pep kreizenn, met n'eo bet savet un asurañs nemet evit digoll an diavaezidi (15 milion a lurioù evit 40 kreizenn), ha n'eo ket evit riskloù ar c'hreizennoù unan. Re sur an nukleel er vro! Hag ivez re vras an arc'hant postet : kement ha 6 kreizenn !!! "Ma 'z eo ret krouiñ ur greizenn nukleel e Breizh, ken-koulz dibab Aodoù-an-Hanternoz" Charles Josselin hag e genseur-ted a zo bet plijet bras gant o zroiad e GRAVELINES, brasañ kreizenn er bed :

"Un embregerezh evel ar re all" emezo. Peseurt embregerezh all a genderc'h danveziou skinoberiantiz e-pad kantvedoù?

"Ul labouradeg dizañjer gant labourerien dinec'h". Kam-poù lazhañ an nazied ivez, sur, e oa gwarded dinec'h !

"Ret eo bevañ diouzh an amzer, ha zoken mont araozañ", eme A. DENDER (paotr P.S. bro Gravelines). Soñjal a ra dezho ez int harozed ar bed nevez, pa 'z int sklaved ar c'hevala.

-Ha dreist-holl : 10 milion a lurioù T.P. (taxe professionnelle) da gouezhañ e sac'h ar parrezioù.

Abegoù toull, abegoù di-boell ! Ret eo d'o spered bezañ breinet gant ar galloud evit bezañ ken berrwel.

Kentoc'h evit pourmen o c'halite ha frikotañ gant ijinourien EDF e vefe bet gwelloc'h tremen div eurvezh o lenn "Tchernobyl, dielfennadur ur goumoulenn" (Champ Libre). Kentoc'h evit goulenn an aluzenn digant E.D.F. e vefe gwelloc'h deoc'h stourm ouzh pouez an ar-me er gevredigezh ! ■

Garan ar MEUR